



UN EMDENNIG

GANT MIKAEL AN NOBLEZ

DU 1991

AR FULENN 43

Pennaouet em eus ar soñjoù-mañ

e RUHEZ MIKAEL AN NOBLEZ

savet gant ur beleg eus eskopti Kemper,

A DREZEN e anv.

Kavet reizh e oa bet e skrid gant an Ao. Guilhou
person Penmarc'h d'an ampoent.

Ar saotret-moulañ a oa roet gant D. Anselme,
eskop Kemper, eus urzh Sant Benead,

d'an 28 a viz gouere 1879.

Ur c'hevrenour meur eo Mikael an Noblez.

Da zeskiñ hon eus gantañ

ha souezhet-mik e chomer

o welout n'emañ ket c'hoazh war aoterioù hor Bro.

AN AOTROU DOUE

- D' e dad, skoet gant Doue pemp bloaz araok e varv, Mikael
an Noblez a ginnigas div brederiadenn da ober. Setu amañ
an hini gantañ:

Petra eo Doue ?

Petra ez on-me ?

Peseurt mad en deus graet din ?

Ha bez ez eus unan berrak tostoc'h egetañ ?

Petra a ran-me evitañ ?

Petra en deus lavaret e roio d'e servijerion ar fealañ ?
Ha d'an tad neuze da eilgeriañ e goueled e galon. Maz eus
un Doue ha me krouet gantañ, ez on dleour dezhañ a gement
a zo din. Doue en deus muioc'h a wir warnon eget al labou-
rer-douar plantet gantañ ur wezenn. Ur micherour sevenet
gantañ un tamm labour. Ar poder war ar pod gweet gantañ.
N'eo ket ar c'houer eo a zegas ar glav, an heol. Ar miche-
rour a ra e labour, ar poder a ra e bod gant danvez all.
Doue a ra a netra.

Dezhañ ez on a-bezh muioc'h eget ar wezenn hag he frouezh
d'al labourer-douar, ar pod d'ar poder en deus e c'hraet
diouzh e zorn.

Dezhañ ez on korf hag ene. Korf hag ene a zo da lakaat e
servij an Aotrou Doue. Ha ma ne vezont ket ez int saotret
gant an droukspered.

AR BEDENN

- Lezel a reas e vreudeur a oa aet gantañ da studiañ da
Ajer evit mont da vevañ e ti ur bourc'hiz a roas dezhañ
da ennez ur gambrig, en ul lec'h distro ha didrouz. Eno e
c'hellas en em reiñ d'ar bedenn.

- Ar c'hiz a oa gant an Tad Kintin hag eñ, goude bezañ la-
bouret e-pad an deiz tremen ul lodenn eus an noz o pediñ.
Ha se e-pad triwec'h vloaz.

- Duet da vezañ kozh hag en em dennet e Konk-Lokrist.

Ne oa mui, emezañ, e tailh da ziskenn er blaenenn e-
mask ar soudarded yaouank ha kalonek. Met war ar menez ne
ebane da sevel e zaouarn war-zu an Neñv evit goulenn ouzh
Doue e c'hrasoù ar puilhañ war ar visionerion ne ouient
ket argilañ da c'houren ouzh an tehoù hag ar plegoù fall. 4

KARANTEZ DOUE

- E Bourdel. Mikael an Noblez a zo war e studioù a feizo-niezh.
- Ar aon, ar spont dirak barnedigezh Doue, an deure (intérêt) en deus pep den da vezañ salvet hag eürus un devezh da zont n'o doa mui a c'halloud war e galon.
- Doue a zo mat ha dreist pep medelezh; setu ar pezh a soñje, sed aze ar pezh a rae e levez. Doue a skuilhas war galon Mikael an Noblez kement a zudi ma teuas e gorf da gaout e lod ha ma oa ret dezhañ en em deurel en jour skornet betek e c'houzoug, o vezañ ne c'halle mui herzel ouzh tan ar garantez doue.
- Ur bloavezh emdenn (retraite) a reas c'hoazh arak stagañ gant ar Misionoù. Divizout a reas neuze bevañ betek e varv er gwel hag er soñj a Zoue.
- Skarzhet eus ti e gerent e kav bod e ti soul e vagerez e Plougernev. E galon avat a zeuas da vezañ sec'h, kalet hag evel skornet. Doue a ehanas dezhañ an aezhennig c'hwek a ro levez e-kreiz an trubuilhoù. E galon a oa arak evel un devezh hañv; bremañ emañ er vrasañ teñvalijenn.
- En Enez-Vaz, er gader, ar c'homzoù a yae ker berv eus e galon tonnet gant garantez Doue ma en em gave e-unan ten-raet. Neuze e komze ouzh ar groaz a zalc'he etre e zaozain.
- En em ziazezañ a ra e Lok-Mazhev (Penr-ar-Bed), o vezañ ma krede en dije gallet en em zastum e goueled e galon, ur wech an amzer evit komz eus e Zoue ha, dre-se, bevañ muioc'h-mui a-unan gantañ.
- D'ar c'uc e lavare: "Ar gwellañ doare da blijout da Zoue eo E anavezout."
- Mikael an Noblez ne ouie ket petra eo meuliñ ar dud kousto pe gousto; ne ouie ket tra nemet servijiñ e Crcuer ha lavarout, hep damantiñ, ar wirionez da bep hini.
- N'eus den ebet a gement a oufe tostaat ouzh an tan hep santout domnder ar gwrez. Nep piv bernak a dostaio eta ouzh Mikael an Noblez a zeuio buan da vezañ tamm-berv e garantez an Aotrou Doue.
- Ar meulganou, ar c'hanennoù decl-se a sklerijenne hag a vage o feiz. Atav c'ruilhñ an tracù-se en c' spered, o c'halonou a zeue da vezañ evel fornioù c'horet gant tan garantez Doue.

AN AOTROU KRIST

- Ne oa Mikael An Noblez nemet 14 vloaz, p'en em ziskouezas dezhañ hor Salver gant e c'houlioù hag e gorf klodus ha dezhañ un doare a vadelezh ar c'haerañ. Chomet eo sioul war ar weladenn-se roet hepken da anavezout d'an Tad Maner ha d'un dimezell santel a Lokronan-Leon.
- C'hoantaat a reas bezañ a-unan gant Jezuz, en ur bellaat ouzh pep tra all. D'an 30 a viz gwengolo 1598, da ouel Sant Yeronimoz e roas ar ouestl da heuliañ an Aotrou Krist hag e groaz ha da ober fae war gement tra all. An devezh a oa evitañ un devezh a levez evel devezh e vadeziant.
- En Enez-Vaz, o vezañ savet uhel-uhel e vuez, e c'harnas onto a-bouez penn: "Grit pinijenn, va breudeur, rak tostaat ouzhoc'h. Kouantelzh Doue. Ret mat eo da hep hini ac'hanec'h ober brezel dindan ur Roue. Bez er deus tri vanniel a veur a liv. A-zindan unan anezho eo dav deoc'h stourm. Dikabit an hini a garit. Bez a zo unan uz: hemañ eo banniel kroez hor Salver. Ar surañ hag an enorusañ eo e heul-lañ dre hent ar vuhez. Neb en deus c'hoant da ober pinijenn, n'en deus ket da varc'hatañ, n'en deus nemet bale dastal ar banniel-se." (an hini gwenn eo hini an eneoù glan ar hini du eo hini ar pec'hed)
- Tri vloaz a-raok e varv, e Konk-Leon, buhez Mikael a oa prederiañ war hor Salver Jezuz Krist yaouankik, disterik hag astennet war ar groaz. Goulennet en doa a-hed e vuhez m'en dije bet sempladurezh ur c'hrouadurig ha poanioù un den stag ouzh ar groaz. Gant m'en dije bet koulskoude e spered mat hag e galon e tro da garout ha da servijiñ Doue.
- Klañv da vervel ez eo Mikael an Noblez. Levez hon den santel a oa neuze soñjal e poanioù hor Salver.
- Ar Aotrou Doue a roas galloud d'an diaoul warnañ. Dont a reas betek teir gwech d'e fustañ en un doare ken didruez ma oa e gorf ken bronduet-holl, penn-kil-ha-troad. An dro ziwzehañ, da Wener-ar-Groaz, an abadenn a oa bet krisoc'h eget ar gwechennoù all. Rak en droioù-se, merkoù an taolioù skourjez ne choment warnañ nemet e-doug un devezh. E-lec'h en dro-mañ, e padont adalek Gwener-ar-Groaz betek ar Sul Pask.
- Ar spered fall-se a gemere plijadur oc'h ober dezhañ da c'houzañv ul lodenn eus poanioù hor Salver. Ur mignon o

o vezañ goulnet digantañ petra a c'hoarveze gant e zorn, Mikael a eilgerias goustadik e oa bet e "geneil bras", da lavarout eo an diaoul, ouzh e weladenniñ.

Gwelout a reed merkoù an tachoù tev en zaouarn betek goude e varv. Ouzhpenn-se, evit ma vije bet e boanio heñveloc'h ouzh poanioù hor Salver, e oa toull e gostez dezhañ, war-dro ur miz arak ma varvas. An abadenn a oa bet tomm. An dud a oa eno, dihunet a-daol gant an trouz a oa bet klevet en e wele, a gavas ar paour-kaezh klañvour o krenañ gant ar spont ha gant ar boan. Gwelout a rejont neuze ur gouli bras-a-walc'h evit lamañ e vuhez digantañ ma re vije ket deuet ur meseg bras da stankañ ar gwad ha d'e bareañ.

- Tost d'ar marv, e c'hourc'hemennas ma vije bet atav unan bennak en e gichen evit lenn, bep noz, Gouzañvidigezh ha Marv hor Salver." Klevout, emezañ, poanioù an Aotrou Krist a ra d'ar c'hlañvour ankounac'haat e re, evit soñjal hep ken e poanioù e Vestr. Ur blijadur vras a oa evitañ klevout danevell poanioù hor Salver er yezh m'en doa prezet a-hed e vuhez penn-da-benn. Ma teue, ur wech an amzer, d'ober d'al lenner ehanañ e oa evit prederiañ war ar misterioù a glev hag evit en em unaniñ muioc'h gant e Aotrou.

- D'ar 5 a viz mae 1652, oadet a 75 vloaz, goude bezañ startet war roull e galon kroaz e Salver muiañ-karet, hon den Doue a rentas e ene kaer d'e Grouer, en ur bokañ a-vriad d'ar groaz benniget.



AR SPERED GLAN

- E Bourgel, war ar feizoniezh (théologie).

En em reiñ a reas, gant e holl nerzh, d'ar bedenn a galon. Ar Spered Santel e-unan eo e gentelie, a leunie e spered...

Spered Doue a oa aet don e ene Mikael hag o vezañ prenet kloz an dorioù, e tarempe e ziabarzh, e komze c'hwek outañ, e roe dezhañ ur peoc'h d'udius.

- E-pad e emdenn (retraite), arak bezañ beleget, e tivizas bevañ en ur gwir frankiz a galon, en hevelep doare ma oa atav darev da zegemerout, gant ar vrasañ anaoudagezh, garsou ar Spered Santel ha da sentin outañ gant ar brasañ mall.

- E Douarnenez, e-pad ar Mision, ur wech glanaet ar c'halon, ha graet lec'h da c'hras ar Spered Santel, Mikael an Noblez a laboure kement ha ma c'helle evit diwriziennañ rac'h gwrizioù ha melloù, ar plegoù fall ha dreist pep tra ar re a oa maget gant kizioù divalav ar bed (ar vesventi sanket en natur).

- E 1641, eiz vloaz war 'n ugent ma oa bet eno Mikael an Noblez, daou Jezvad, o vezañ klevet ne oa en Enez-Sun beleg ebet a yeas di. Ul levenez vras e oa evito kaout ar besketaerion leun gant ar Spered Santel a reas Mikael an Noblez diskenn warno keit-all a oa.

AR C'HRAS

- E Ajen, oc'h aliañ ar studierion all:

- Gouzout a rit ez oc'h bresk evel ur gorzhenn ha prest da derriñ. Met klevet hoc'h eus mouezh Jezuz, bez e c'hallit bezañ disoursi. Rak ar gorzhennig pa ra an dro d'ar wezenn derv a vez diwallet er gwashañ avelioù. Harpet ivez gant an Aotrou Doue, n'hoc'h eus ket a lec'h da gaout an disterañ spont.

AN EUKARISTIA

- Na bigne morse ouzh an Aoter nemet graet en dije, en devezh araok, ur binijenn galet bennak. D'an taol a hanternoz, e oa war-sav evit en em brientiñ d'an Aberzh Santel. E-pad div eur, e rae seizh pleustradeg (exercice) speredel a gaver, hiziv-an-deiz, skrivet gantañ en ul levrig e parch.

Kait ha ma chome ouzh an aoter, e veze fromet ar c'halonou. E zremm a oa flamm-flamm evel glaou-tan, e zaoulagad ken berv ma steredennent. Ne oa mui eus an douar; beuzet e oa e Doue.

Ur wech diskennet eus an aoter, e chome e-pad div eur dioutañ e-unan-kaer gant e Zoue. Betek mont er-maez anezhañ e-unan. Ne gleva, ne wele, ne fiñve tamm ebet, kollet e Doue.

- Unan eus an devezhioù kaerañ e vuhez a oa an devezh ma welas enezidi Eusa, tud duet ha kaledet gant ar mor hag an amzer o tostaat ouzh an Daol Santel.

- E Konk-Leon, e lakaas ur c'hiz da begañ er vro-se ha diouzh ma lavarer eo chomet c'hoazh eno (levr savet e 1879). Ar c'hiz-se eo tostaat, ur wech ar-miz, ouzh Sakramant an Aoter, pediñ diouzh ar mintin ha diouzh an noz, ober ur penndig lenn bep noz, arack mont da gousket.



AR WERC'HEZ VARI

- Ar c'hrouadur, petra bennak ne oa nemet pemp bloaz, ne d'enne penn eus chapel Sant Klaoda, e-kichen Maner Kerodern, ti e dud (e Plougernev). Ma c'houlenne e vamm digantañ a ba tu e teue, e eilgerie bepred e oa eus ti Doue.

- Un Itron, emezañ, e gase dre an dorn hag a zeske dezhañ pediñ...

Un devezh, e vamm, gant aon na vije kouezhet el lenn ha beuzet, e lakaas en ur gambr, alc'hwezet-kloz an nor war noñ. Souezhet-bras e oa ouzh e gaout o pediñ war e zaoulin en hevelep chapel. Ar bugel a gontas d'e vamm e oa deuet an hevelep Itron kaer evel an heol da zigeriñ an nor dezhañ ha d'e gas betek ar chapel evit deskiñ dezhañ gent pegement a zeoliez eo ret en em strinkañ dirak an Doue Peursantel.

- N'ouzon ket, a lavare ar paotrig, na piv eo an Itron-se, nag a be-lec'h e oa deuet, na da ba tu e oa aet.

- War ar studi e Bourdel, dibabet evel priol ar Vreizhiz, e teskas c'hoari gant an armoù. O vont da dreuziñ korf un den a glaske lazhañ e vreur yaouank, e klevas ur vouezh o lavarout:

- Chom, chom, selaou ar pezh a lavar an Aotrou Doue ez kalon, heuilh an hent en deus graet, o vezañ uvel, dinamm, distag a bep tra ha leun a fae war draoù ar bed..."

Aravezout a reas diouzhtu mouezh Itron chapel Kerodern. Stlapan a reas pell dioutañ e gleze hag e touas d'an Itron e vije hiviziken he bugel. E galon a zeuas da vezañ leun a gred. Neuze e santas un taol eus ar c'hras a ra d'un den kemman a-bezh hag a ra anezhañ ur benveg e servij an Aotrou.

- E Ajen (Agen), e Kompagnunez Jezuz, e c'houlennas bezañ degemeret e Breuriezh ar Werc'hez Vari savet evit mirout ar glanded e-mesk ar skolidi.

- Tamallet e faos e Ajen, ec'h en em erbede ouzh ar Werc'hez. Neuze ar c'homzoù-mañ a yeas don hag a chomas en e galon:

- Va c'hrouadur, n'ho pezit aon ebet, rak va mab ho tiwallo ha me a vezo a-du ganeoc'h.

Pignat a reas en e gambrig hag e welas e Itron o tougenn en he dorn teir gurunenn a lakaas war benn Mikael. Ar hini gentañ a oa kurunenn an dud gwerc'h. Kerzhout a

a 'hello dre greiz arvaroù ar bed-mañ, asur da virout e c'hlanded betek e alanad diwezhañ. An eil a oa ar gurunenn a gelenner (doktor), a vestr evit heñtchañ an eneoù war-du ar santelezh. An trede a oa kurunenn ar re a ra fæ war ar bed.

Setu ar pezh a dlee c'hoarvezout e-pad an 52 vloaz ma vevas da-c'houde.

- Echuet gantañ e studioù e Bourdel ez eas da birc'hiriñ d'ur chapel d'an Itron Varia, evit he zrugarekaat da vezañ graet war e dro e-doug an amzer tremenet gantañ er gêr-se.

- En eil brederiadenn kinniget gant Mikael an Noblez, d'e dad e kavomp ar goulenn-mañ:

- Na bez ez oc'h-c'hwi mignon bras d'e Vamm Santel ?

- Araok mont e kêr Kemper, o vezañ ne ouie ket da be-lec'h mont goude, e pedas an Aotrou Doue, dre an Itron Varia, da anavezout ar vro he doa ar muiañ ezhomm eus e c'hwezenn. Gwelout a reas splann, dre ur sklerijenn deuet dezhañ eus an neñv, e oa galvet da p-Bloare.

- Skarzhet eo kuit eus eskopti Kernev ha ret dezhañ mont eus Douarnenez. En e brezegenn kenavo e lavaro:

- Pedit a ran a-greiz kalon hag ar Mab hag ar Vamm da c'hom ganeoc'h ha da zont d'am heul em beaj.

Ar holl en em strinkas d'an daoulin. Mikael a roas dezho e vennozh diwezhañ. Neuze e pignas er vag a dlee e gas da k-Gonk-Leon.

- E kerz e anken-veur, e falvezas dezhañ e vije aet raktal goude e varv e ziskibien hag e vignoned da bediñ ar Werc'hez hag an holl Sent e ziwallerion, en un iliz savet en eoc'h da Santez Barba. Eno, o dije kinniget d'an Tad teñzoù, dellidoù hor Salver evit e dennañ er-maez eus tan ar parkator, ma vije degouezhet gantañ mont di evit netaat ha melenaat aour e garantez.

- War e dremenven, e tisklerias:

- An Itron Varia, va Mestrez, n'he deus morse ankounac'haet he servijer. Pa oan er boan, yaouank-flamm c'hoazh, e plijas ganti diskenn betek ennon. Goude m'he devoa va diboniet, e roas din, eus a-berzh he Mab, kurunenn an dud g'erc'h, an dud glan, gant ar surentez da dremen dre ris-kioù ar bed, hep an disterañ droug ebet.

AN ABOSTOLEREZH

- War skouer Sant Ignaz a Loyola, e c'hoantaas labourat ka lenek evit brasañ klod an Aotrou Doue ha silvidigezh an eneoù. Eveltañ e poanias start da c'hwezhañ e kalonoù ar re all tan karantez Doue a zeve e hini.

- Bep sul, e Ajen, ez ae Per Kintin, an den yaouank kanttro-e' gant Mikael an Noblez da ober katekiz d'an dud diwar ar maez.

- Kurunenn an doktored a zo lakaet dezhañ war e benn gant ar Werc'hez Vari.

- E Ajen, e klevas an Aotrou o lavarout dezhañ:

- Anaout a rit kleñved hoc'h ene hag al louzoù d'e bareañ. Mat, Doue a c'houlenn ma skoazellfec'h ho predeur da anavezout ho hini ha ma tiskouezfec'h dezho al louzoù.

- Eus Tolosa e skriv da studierion Ajen:

- N'en em emellit ket da vleniañ ho predeur, ma n'hoc'h eus ket gouiziegezh ha santelezh.

- E Bourdel, e studi ar feizoniezh, pevar bloaz leun. Eno e laboura da anavezout kleñvedoù an ene hag an doare d'o louzaouiñ, d'o fareañ.

- E Bourdel, hag a boan kemeret gantañ evit degas er gwir hent an eneoù prenet gant gwad hor Salver. Setu perak e kastize e gorf, oc'h en em skourjezañ, o yuniñ. Kouskat a rae war an douar yen ha ne gemere morse perzh e diduellaù e geneiled.

- E Bourdel e savas ur vreuriezh evit derc'hel ar feiz bev e-touez an dud diwar ar maez. Gant ar studierion all war ar feizoniezh, ez aent daou ha daou evel gwechall diskibled hor Salver.

- Mikael an Noblez a oa boas da lavarout:

- Ar c'hatekiz graet a-zoare a zoug alies muioc'h a frouezh eget ar prezegenoù bras. Ar re-mañ a zo heñvel ouzh un tantad raden a ya betek an oabl hag, ur pennadig goude, a lez an oaled yen-sklas.

- Erru adarre e Plougernev, ez a amañ hag a-hont, du-mañ, du hont da ziwall al loened. Prest goude, en devoa urzh da gitaat ti e dad... Hag en em denn e ti e vagerez. Bemdez ez a dre ar c'hêrioù, bodañ

- 'a en-dro dezhañ ar vugale hag o c'henteliañ a ra war ar c'hatekiz.

- E peniti Tremenac'h, e teskas komz hepken a Zoue hag ar pezh a sell ouzh e c'hlod. Ec'h anavezaz ar gwirionezhioù a oa ar gwellañ da galon pep unan. E c'hellas dibab ar

pezh a oa ar gouestañ da lakaat ar re all da zistreiñ ouzh an Aotrou Doue. E oa sklerijennet da c'houzout ar seked da zeskiñ d'ar bobl ar pezh a sell ouzh ar silvidigezh.

- E Plougernev, en iliz, en tiez war ar maez, en hentoù, e-ki c'hen ar c'hroazioù e vode en-dro dezhañ un nebeudig tud a youl vat hag e tisplege dirazo al lezenn gristen en un d'are sklaer ha splann. Sevel a reas ivez e vouezh a-enep ar dizurzioù gant un nerzh-kalon ha ne oa ket bet gwelet betek neuze he far.

- A-raok m'en deveze kemeret e voued, ez ae, levr ar bedenn ar-zindan e gazel, eus an eil kêr d'eben da zeskiñ he c'hre denn d'ar bobl. Piv a lavarfe an habaskted a gemere evit deskiñ d'ar vugaliqoù o c'hatekiz ? Piv a lavaro an ijin en doa evit ober d'ar re vras ha d'ar re gozh kaout plijadur o selaouiñ e gentelioù.

- E Ploare ez ae da glask ar gouerion en o farkoù hag en o kiez. Mont a rae ivez da welout an holl dud klañv evit ober katekiz dezho. Da sul, ez ae da labourat d'ar parrezioù tostañ. Eno e prezege, e rae katekiz, e kofesae gant un aked na vez ket gwelet alies e bar. An tri embregadeg (e-xercice)-se, e lavare Mikael an Noblez a zo evel teir chadenn alaouret ma ra ganto Doue ganto evit gounit ar bec'herion an dallañ hag ar c'haletañ. Alies e lavare e-vel Sant Paol: " Mallozh din ma ne brezegant ket ar C'heloù Mat! "

- Talet a-zindan toenn e gerent, e kendalc'has da gelenn ar bobl. An dud dister, ar beorien, ar vugale hepken a denne o mad eus ar pezh a glevant. O vezañ diskiant er c'hiz se eo e teuas da c'hounit da Zoue pobloù ha broioù tud.

- E Molenez, d'ar mare-se, ar c'hrozvuiañ eus ar vartoloded a oa oc'h ober ar beskerezh. Mikael an Noblez a yae d'o c'haout hag a bigne en darn vrasañ eus ar bigi. Neuze ar vartoloded-se kaledet gant an amzer hag al labourioù, a ziorle da ouelañ e-giz bugale. Daoublegañ a raent kerdin o lagoù evit gallout kastizañ o c'horf ha dre-se paeañ o die da reizhded an Aotrou Doue.

- E Eusa, ec'h aliañ ar person da zerc'hel dreist pep tra da ober katekiz d'ar vugale.

- Coude-se e ra d'e c'hoar dont da beurober e labour. Ar c'hiz-se da c'houlenn katekiz digant an holl a dremenas e meur a barrez all. Aketus e oa da zeskiñ gwragez martoloded Douarnenez ha d'o lakaat e tro da genteliañ o zud distroet eus ar mor.

AR GLANDED

- D'an oadoù ma sant an den tan ar youloù fall o teviñ e wezhied, e stagas da c'houren ouzh an diaoul. Gouzout a reas pegen dister ha pegen bresk e oa. An disfi-se anezhañ e unan eo a viras outañ da vont da goll. Setu perak e kouske war an douar-ran, ne gemere plijadur ebet, e rae pinijenoù garv.

Un devezh e oa aet en ur c'hoad da sevel e spered war-du an Aotrou Doue, pa sailhas warnañ diaoul hudur. En em deurel a reas e noazh e-kreiz an drez hag ar spenn.

Ur wech all, en em stlapas e-kreiz an erc'h, en noazh, hag e chomas eno war-dro teir eur, hanter-varv gant ar yenijenn. E-pad an amzer-se, e galon a zeve gant ar garantez doueel en doa Doue c'hwezhet ennañ. Digollet mat e oa eus e stourm hag an Aotrou Doue a roas dezhañ ar vertuz a c'hlanded a zalc'has kaer ha flamm e-pad an dilerc'h eus e vuhez.

- E Ajen, e oa bet lakaet dezhañ war e benn gant ar Wer-c'hez Vari teir gurunenn. An hini gentañ a oa kurunenn an den glan ha gwerc'h. Bez e c'hello eta kerzhout dre greiz arvaroù ar bed, asur da virout e c'hlanded betek e huanad diwezhañ.

- War e dremenven, e tisklerias:

- Hiziv, e lavaran sklaer n'em eus morse, a-hed va buhez, graet an disterañ pec'hed a-enep ar vertuz santel. Hen touiñ a ran dirak va c'hrouer am barno dizale, va dorn astennet war Sakramant an Aoter. An dra-se a lavaran dirazoc'h evit ma teufoc'h da drugarekaat a-gevret ganin an Hini en deus roet din ar c'hbras-se. An dra-mañ a lavaran evit klodekaat (glorifier) an Aotrou, evit mad an dud am eus klasket hentañ war hent ar vertuzioù hag evit ma rofec'h maoc'h a stad eus ar pezh am eus prezeget deoc'h dre urzh an Aotrou Doue.



AN ASKEZ-AR BINIJENN

- Araok kregiñ gant e visionoù, en em denn a-gostez. Ober a reas sevel e-kichen ar mor, e Tremenac'h (Plougernev), ul lochennig soul. E-pad bloaz e vevas eno.

Nc'z ha deiz e touge ur roched reun. War an douar e kcuske, ur maen harp d'e benn. Ne zebre nemet ur wech an deiz un tammig yod heiz ha diholen, hep tamm amann, hep banne laezh ebet.

Ur vaouezig kozh eus ar gêr tostañ a zegase, en ur piadig, an tammig yod-se a ginnige dezhañ dre un toullig graet e moger al logellig. Graet en doa ivez ul lestrig, un hanaf ha ne eve nemet leizh a hounnezh a zour. Dre vevañ er c'hiz-se e teuas e stomog da strishaat ha da baouraat kement ma ne c'hellas mui betek e varv kemerout e voued nemet gant ar brasañ poan.

Pardon a c'houlennas alies abaoe digant an Aotrou Doue da vezañ bet ken didruez en e geñver e-unan... E-pad ar ugent vloaz diwezhañ e vuhez ne c'helle mui labourat diouzh e c'hoant evit silvidigezh an eneoù. "Koulskoude, emezañ, em eus lec'h da drugarekaat an Aotrou Doue, rak aet eo va ene war gresk e karantez Doue."

- En emdenn (retred), bloaz a-raok boulc'hañ gant ar misi-onoù, e tivizas ober ar pini-jennoù ar c'haletañ evit kabestriañ e dechoù fall. Evit kaout ur galon distag diouzh re a garantez evit e gerent hag an traoù kleuz na dennont ket da glod an Aotrou Doue.

- Goude e emdenn, e kuita e vaner hag ez a d'ul lec'h gouez. Sevel a ra ul lochennig paour. Bevañ a ra eno tal-hatal gant e Zoue. Ober a ra yun an nav steredenn, en em gastizañ a ra betek ar gwad, kouskat a ra war an douar yen...

- Goude e oferenn e Plougernev ez ae da aozañ un tammig boued. Ne bade ket pell an aozañ-se, m'hel lavar deoc'h. Kemerout a rae bara groz ar mevelien hag e dorre a-dammoù en ur skudell goad. War-c'horre e taole ur banne soubenn graet evit mevelion ar maner. Morse ne dañvae eus ar pezh a d'lee bezañ servijet ouzh taol an dudjentil.

- Pevar bloaz e chomas e Kêr Bourdel. C'hwec'h miz e tremenas goude oc'h en em reiñ d'ar rustañ pini-jennoù. Kement-se c'hoazh evel Sant Inigo a Loyola evit en em bri-entiañ d'an urzhioù.

AN IZELEGEZH

- Ar tu kizidik, an tu gwiridik eus kalon Mikael a oa "kre-
nañ gant aon da gouezhañ dindan dispriz ar bed".

Aze emañ an dalc'h, aze emañ e dech. KerKent e ped an Aotrou Doue ma plij gantañ degas betek ennañ evit e bar-
reañ an holl dismegañsoù hag e c'holoñ a vezh dirak an
dud. Tamallet eo e faos ha frealzét gant Mari.

- Stlapet eo kuit eus ti e dud hag o doa mezh gant o mab.
Met gouestlañ a ra chom e Plougernev evit gallout evañ an
dismegañsoù a gouezhe warnañ a bep tu. En em repuiñ a re-
as e ti soul e vagerez.

- Gant an dud vras, gouiziek, gant ar vondianed eo dismegañ-
set. Un denjentil eus e gerent a glaskas e lazhañ. Fellout
a reas da dud a vuhez diroll e lakaat da bec'hiñ. Erfin
e oa douget klemm dirak an eskob evel pa vije bet un den
ha ne oa nemet fallagriezh ouzh e heul. An Aotrou a Loued
e wikel-vras a lakaas skler ha fraezh dirak daoulagad an
holl pegen divlamm e oa ar beleg santel eus ar pezh a oa
tamallet dezhañ.

- N'eo ket hepken ar re en em gave flemmet eo en em
save en e enep. Bez e oa c'hoazh ur ouenn a dud all ha ne
bije ket dezho doare Mikael an Noblez. Ne falveze ket
dezho evit netra er bed e vije stoket ouzh o c'hizioù
fall pe vat ma vezent. Ar re-mañ, boazet maz oant da we-
lout ar veleion stag ouzh ur barrez evel person pe gure,
a grede ur beleg, evel hemañ, o vont hag o tont en ur bre-
zeg, a yae a-enep pep urzh hag a-enep reizh vat.

- De gentañ, e Douarnenez, nebeut a dud a brizas ganto
dent da selaou e gentelioù. An darn vuiañ anezho ne oant
ket evit gouzañv e vije goulennet diganto ar pezh a veze
goulennet digant ar vugale. Lod all a lavare: " Re gozh ez
omp evit en em lakaat a-nevez d'ar c'hatekiz, an envor ne
bieg mui da seurt traoù. Ouzhpenn-se, hon tadoù-kozh ne o-
ant ket desketoc'h egedomp ha kement-se ne vire ket outo
da vezañ tud onest. Lod a lavare a-zindan, e pleg ar skou-
arn, e ouie ar misioner ar pec'hedoù ar c'hushetañ. "Hen-
nezh, emezo, a dle bezañ sorser hag a oar en em silañ betek
strad ar galon." Bez e oa zoken hag a yae betek lavarout
e oa an Enepkrist e-unan hag e oa ar bed tost d'an diwezh.

Kuer e oa e c'hoapaat ha reiñ dezhañ ar rebechoù ar
re c'hwervañ, an niver eus e ziskibion a gresket muioc'h-

anti. Lod eus an dud a yeas betek mirout ouzh o gwraez hag o bugale mont da glevout koñchennoù ha farserezhioù ar estreniad. Mont a rejont zoken betek lakaat ar polis war-lerc'h Mikael an Noblez.

- Arak mont da Bloare, Doue roas dezhañ da c'houzout e vije kouezhet gliz an neñv seul drusoc'h ha seul fonnusoc'h war e labour ma vije bras ha c'hwerv e boanioù.

- Taget e zoare da gatekizañ dre an taolenoù, e skriv ul lizher da vikel-vras Kernev:

- Ma ne gav ket deoc'h e vefe mat ar c'hiz-se da zisplegañ ar gwirionezhioù kristen, lavarit ur ger hepken hag e wefoc'h selaouet. N'am bo poan ebet o tilezel va mennoz

Ar vikel-vras a blijas dezhañ komzoù uvel Mikael an Noblez. Un den hag a oa darev da selaouiñ mouezh ar re o deus galloud warnañ a ranke bezañ un den a Zoue.

E Douarnenez, un daolenn ne blijas ket evit doare da nan bennak. Enni e tispleged e tle ar c'hristen en em dennañ eus darempred ar re a oa spered ar bed ouzh o labourat.

Mikael an Noblez, o welout en e enep ar re a dlee e harpañ e-kreiz e labour, a dec'has kuit hag a yeas da oferennañ ha da gofes da Bouldac'hu.



AR FAE WAR AR BED

- Goude bezañ gwelet an Aotrou Krist, ez eas don en e galon, ar soñj-mañ: evit plijout da Zoue ez eo ret kaout kas ouzh traoù ar bed, ober fae warno hag en em drec'hiñ honunan. Ar soñj-se a wriziennas en e ziabarzh, a sklerijen-nas e hent hag a chomas en e spered betek ar marv.

- Lavarout a rae da studierion Ajen:

- Ret eo ober fae war ar bed-mañ. Setu aze, emezañ, ar maen-fond, maen kentañ ar vuhez nevez.

- Unan eus an teir kurunenn lakaet dezhañ war e benn gant Santez Mari a oa kurunenn ar fae war ar bed.

- Edo ar c'hiz da bediñ ur pevar pe bemp kant den, an devezh ma tlee ar beleg yaouank lidañ e oferenn gentañ. War zigarez reiñ ur prof bennak d'ar beleg nevez, e tremened daou zevezh er friko hag er c'horoll. Mikael ne fellas ket dezhañ plegañ d'ar c'hiz-se. Ar fae a rae war traoù an douar a vire outañ da lezel tremen ur gouel ken kaer e plijadurioù hag e ebatoù ar bed.

- Tad Mikael an Noblez ne soñje nemet gwelout e vugale meulet dreist an holl ha klevout a rae alies e oa e vab un den helavar hag a brezege kaer. Hag ez eas d'e selaou. Tizhet e oa an Aotrou a Gerodern betek bev e galon. Ha setu ar mab d'ar maner da gaout e dad. Ar Spered Santel a vat a gasas dezhañ ur soñj leun a ijin. O vezañ graet deges ur skudell, e lakaas enni un tammig pri hag he leunias raktal a zour:

- Dremañ, emezañ d'e dad, sellit ha gwelit ho patrom en dour.

Hag e kemmeske ar pri hag an dour gant e viz.

- Gortozit ur pennadig, eme an tad, ken na vo deuet an dour da vezañ sioul.

- En hevelep stad, eme ar mab, emañ hoc'h endon (conscience). Ne c'hellit ket gwelout mat a-walc'h hag anavezout ho plegoù fall o vezañ maz eo kemmesket ho kalon gent traoù an douar.

Mikael a lezas neuze e dad etre daouarn an Aotrou Doue hag e lochenn e vagerez e skrivas d'e dad ur reolenn a vuhez. Lavarout a ra dezhañ n'eo ket a-walc'h chom hep labourat da sul. Arabat dezhañ zoken, war ar pemdez, gounit ar disterañ hep distagañ e galon diouzh an traoù krouet. Lezel aferioù e di evit ober war-dro an afer vras, hini ar silvidigezh. Boued ar c'horf a ze retoc'h eget boued an

enn. Lenn bemdez un draig bennak evit bezañ sklerijennet
ha kreñvaat. Ober un tammig pinijenn, ar bedenn a galon
hag an holl embregadegoù (exercices) a zeoliez.

- Ober a reas da k-Gemperiz kemmañ kalz o doare-be-
veñ. Rouez avat e oa ar re a c'hellas Mikael an Noblez
hentañ war-du ar binijenn, ar bedenn a galon, ar garantez
virvidik evit an nesañ hag ar fae war draoù ar bed.

- E wamm a zeuas d'en em zistagañ groñs diouzh ar bed, da
ober fae warnañ, d'en em reiñ d'an traoù speredel, d'ar be-
denn a galon ha d'an oberoù a drugarez. Mervel a reas e
1615.

- Galvet e oa gant an dud "ar beleg foll", ar beleg diski-
artet. Lavarout a raent anezhañ ar pezh a oa bet lavaret
d'ar-benn Sant Paol. Re a zeskadurezh hag a garantez o
doa graet dezhañ koll e skiant vat. Gwir eo en doa troet
kein da furnez ha da gizioù fall ar bed, evit heuliañ fol-
lertez ar Groaz.

- En e brezegenn o kuitaat Enez-Vaz:

- Arabat deoc'h ober stad ouzh traoù an douar. N'eus
nemet un dra vras, tra ar silvidigezh; ar peurrest a zo a-
vel ha moged. Distagit ho kalon eus traoù an douar, o ve-
zañ maz int bresk ha maz eont buan da netra.

- Vitec'h vras Kernev o tifenn Mikael an Noblez:

- Klevit ganin, Aotrou, meur a vloaz endev a zo abaoe
m'en deus Mikael an Noblez graet ar bromesa da vervel
d'ar bed. Leun a fae war draoù an amzer, ne glask nemet
traoù ar beurbadelezh, nemet gounit da Zoue an eneoù pre-
net gant gwad hor Salver.

- E Landerneve, ne zeuas eta da selaou Mikael an Noblez nemet
an dudigoù paour ha dister o doare.

- Ne chomas ket pell e Meilarz. Distag-krenn diouzh pep
tra war an douar, ez ae d'al lec'h ma krede e oa
galvet gant an Aotrou Doue.

- O kuitaat da-vat Douarnenez:

- Eürus ha mil gwech eürus e vijen bet da dremen an
dilerc'h eus va buhez ouzh hoc'h aliañ da dreiñ kein d'ar
bed, d'e gizioù fall, evit bevañ mat gant Doue ha gant an
nesañ.

- Mikael an Noblez astennet war e wele a boan, a roe an he-
velep ali d'an holl:

- C'hoant hoc'h eus da vezañ disi, emezañ, troit kein
d'ar bed, marvit a-grenn d'e lezennoù...


AR SANTELEZH

- Dus Tolosa e skrive da studierion Ajen:

- Grit ma vezo war un dro ho studi war ar santelezh
koulz ha war deskadurezh traoù ar bed... Stank eo an dud a
zo e poan da vezañ desket-kaer, rouez avat eo ar re a
glask bezañ vertuzus. Truez am eus eus tud desket-bras,
met, siwazh, n'ouzont ket en em drec'hif...

Bezañ peurvat n'eo ket en em dennañ eus ar bed, gwis-
koñ mezher-ballin, debriñ nebeut, ober pinijennoù kalet,
chom pell war vale ha sevel mintin. Bezañ disi eo stlapañ
er-maez eus ho kalon soñjoù ar bed, chom el lec'h m'en
Doue ho lakaet, en em zisprizout hon-unan, bezañ laouen pa
vezoc'h disprizet, ober fae war traoù an douar hag en em
drec'hif kement ha ma c'hellit. Aze emañ ar peurvad, an
hent graet gant hor Salver e-unan...

- Lavarout a rae Mikael an Noblez en doa ur garantez, un
denderidigezh dreist penn evit teir eus e verc'hed: Montrou
lez, Konk-Leon ha Douarnenez. Houmañ c'hoazh a gare en tu
d'ar re all, abalamour m'en doa bet eno digant Doue
m'ioe'h da c'houzañv evit Jezuz, abalamour m'en doa
kavet eno m'ioe'h a eneoù eus an dibab a yae eeun evel ar
goulm war-du ar peurvad.





Un ene distroet ouzh Doue
en ur welout ar boan graet dezhañ gant ar pec'hed